

*René Gougeon*

# *Feiz·ha·Breiz*

---



DU 1927



*Ra chomo peb unan Breizad,  
Dre holl, bepred, betek mervel !*

---

---

## FEIZ HA BREIZ



EO  
KOSA  
KAERA  
HA MARCHADMATA  
KANNAD MIZIEK SKEUDENNET  
A C'HELL KAOUT  
AR VRETONED

FEIZ HA BREIZ a gav dor ziĝer e hement  
ti kristen e vez kempet ennan brezoneg.

## Er Bloaz 1927

**FEIZ HA BREIZ** a vezo kais kastroc'h c'hoaz; kreski a ralo  
eus an habiter; e vent a vezo an hini a voe roet d'ezan pa voe  
krouet, er bloaz 1865, hag a vras epad 15 vloaz.  
Digos e vezo n'eo ket hepken **D'AR PEVAR BREUB**, da la-  
varet eo da vrezonag Leon, da hini Treger, da hini Kerne ha da  
hini Gwened, met hez da hini Bretoned Breiz-Uhel o deus rak  
ket deski brezoneg, man, siouaz, war barleno o mammou,  
met el lezenn; daoust da-se, gweliet a roech, e ontzont en em  
dena gantun bras bras, hag hep date Breiz a ontzont en em  
glevet eus an eil penn d'egile da Vreiz ha n'o devezo ken  
trezo nemed eur feiz, eur yez, eur galon.  
**FEIZ HA BREIZ** a ralo **TRO VREIZ**; embann a ralo, gant  
laotennou dispar, studiadennoù war hon ilizon-meur, hor  
cheplion, hor c'halvariou, hon tennorion a bep stum hag a  
bep drauz; peadra a vezo gantan da ober eul levr evel ma  
n'eus ket bet moulet c'hoaz hini ebet ker kaer e brezoneg.  
N'eo ket 40 skrivagner eo a skrivio ennan er bloaz 1927, met  
50, da nebeuta.  
Daoust d'ezze e vezo ker marchad mat ha biskoaz.  
Da gemeret en hor mouleriz pe en hon ties-gwerz, diouz  
an niverenn, ne gonto nemet 4 real hepken.  
Da gemeret, diouz ar bloaz, pa ne gemerer nemed eus ni-  
verenn hepken, eo 13 lur ha 10 lur hepken, dre bez, pa gemer-  
er da nebeuta 5 niverenn.

KOUMANANTIT DA FEIZ HA BREIZ  
HIZIO KENTOC'H EGET WARCHOAZ

O kas ar priz anezan hag hoc'h adres, dre ar post, d'an  
A. Georgelin, 4, rue du Château, Brest C/C 44.40, Rennes.  
Ienavo, lennerien vat ha krenvrolz ker, ha bennoz Doue  
d'oc'h.  
Plougern, d'an 8 a viz Keru 1926.

Y. V. PERROT,  
Rener e Feiz ha Breiz.

## Prizioù an divnadennou

bet embannet e Feiz ha Breiz, miz C'houevrer, miz Meurz, miz Ebrel ha miz Mae.

En deus bet 400 p.:

J.-M. Salaun, an Trehou.

O deus bet 380 p.:

Clet ar C'hoz, Park an Duk, Brest.

J.-L. Guillerm, Kertanguy, Gleder.

Anna Parcheminou, Sant Nik.

Mari Pellen, Treouergal.

Yann ar Perrol, Gardalaz, Roskov.

Visant Prigent, Skolach Kastell-Paol.

M.-A. Segalen, Gouesnou.

O deus bet 360 p.:

Mari Bramouille, Sant Divy.

Breizad an Drev-nevez, Kastell-Paol.

Mikael Darchen, Mahalon.

Goul'hen Jaouen, Kerjedan, Gouesnou.

Gabriel Kersimon, Plabenneg.

Mikael de Rusunan, Skolach Kastell-Paol.

O deus bet 340 p.:

Balafenn Wann, Kastell-Paol.

Louis Corbel, Skolach Kastell-Paol.

O deus bet 320 p.:

Herri an Arvor, Mahalon.

Albert ar Bras, Poullbroen, Gwiniventer.

Yann an Diverres, Killeveneg, an Trehou.

Felix Moal, Enez-Vaz.

O deus bet 300 p.:

August Abarnou, Plouvian.

Mar. Cabon, Guiseny.

Louis Diquelou, Ploumeur.

Paulina Pividić, Gwikar.

Franeza ar Gall, Plougastell.

Kaset eo ar prizioù d'ar c'honideten e deizioù diveza  
miz Here.

Kement e plij an divnadennou, ha ker mat int da lema-  
na ar speredou, ma tigorint eur genstrivadeg nevez war-  
no e miz Genver, ma zeu adarre, met goulenn a reomp ouz  
hol lennerien digas d'omp divnadennou nevez, traou ha  
s'nt ket bet moulet c'hoaz e nep lec'h ha traou kaer, hag  
ar respouhon da heul, na petra 'ta!

## Ma fell d'eoc'h lenn brezoneg skrivet e yez Treger lennit BREIZ

Kazetenn savet evit difenn ar Fe hag ar Vro

Rener : E. AR MOAL.

Merour : An A. MIARD, 27, Bali Charner, Sant-Brieg.

Ar gazetenn a zo 15 lur er bloaz

Skriva d'an A. MIARD c/c Rennes 10.580

## En Terre Celtique

Six pièces faciles pour piano

- |   |                                |
|---|--------------------------------|
| 1. — Chanson Galloise                       | 4. — Cornemuse des Highlands   |
| 2. — Cortège de noce en Tréger              | 5. — Soir de mai dans l'Argoad |
| 3. — Dans les brumes de la mer des Hébrides | 6. — Danse des épées.          |

PAR MAURICE DUHAMEL

PRIX NET : 3 Fr. 50 (majoration en sus)


Henry Lemolne et C<sup>ie</sup>, Editeurs — Paris, 17 rue Pigalle (IX<sup>e</sup>)

Lennit,  
skignit,  
mirit

## Feiz ha Breiz Kannad ar Vretoned

Da zek lur er bloaz hepken e teu ar pezh,  
pa gemerer, da nebeuta, 5 niverenn.





### CHAPEL ITRON VARIA KALLOT

D'ar zul war-lerc'h Hanter-Eost edo an diveza eus an tri bardon a vez graet hep bloaz e Kallot; ar chapel-ze a zo savet en eun enezenn hag a zo stag ouz parrez Karanteg; an daou bardon all a vez graet da lun ar Pantekost ha da lun an Dreinded; mui a vez a dud eo da lun an Dreinded.

Chapel Kallot a zo er mor, dres, e kreiz etre beg Primele e Plougasson, ha beg ar Bloakon, e Roskov. Diwar an dorgenn a zo o wasked e vein gant an avel hag ar gloaz a gouez warno, ho peus eur gwel eus ar re gaera: a-gleiz, emañ aod ar Baradoz, eun aod hag a zo bet roet an ano kaer-ze d'ez, m'arvat, dre ma 'z eo glas ha sioul he zevvenno ha ma weler o'ch en eun leda war he mor skeud tourion Kastell-Paot, a-zehou emañ ober Montroulez, ar mor glas o'ch enenni war ar reter, kastell an Taro, ar ligi o kosteza dindan o gouelioù rus ha pelloc'h douron uhel noas Plouezoc'h ha Plougasson, beg gant Primele, ha kalz pelloc'h, aochou bro Dreger hanter guzet e glaster ar c'hoabr.



Chapel Kallot

an douar bras. Eun taol gwall vor bennak, digouezet breman ez eus, den ne oar pet kant vloaz, mat a-walc'h, a c'holoas an douron izel ha ne lezas hep o gouledli nemed an tegin hag ar reier brasa.

An avel walarn o c'houeza, edoug ar c'hantevjour, war an trez a zo e lost aod ar Penze he deus douget kargadon anez war reier Kallot ha graet tevennou a stag an holl dergize en eil ouz eun. An trezouze toneziel gant bizin ha mannou

a zo deuet da veza mezion hag a ro eostou eus ar re builha hag a vag dek liegez bennak, war dro eur c'hant a dud enno. Tad Kallot a c'houind brao c'hoaz gand o fesked ha gand o bizin.

Setu amañ, hervez an Tad Albert Le Grand, penaos eo bet savet chapel Kallot. Er bloaz 489, emezan, laeron-vor eus an Danemark, eur mestr, anvet Korsold, en o fenn, a zouaras war aochou Leon hag a zavas eur c'hastell-krenv, e Kallot, da gloza ennan ar pezh a c'heille da laerez er vro tro-war-dro. Epad dek vloaz e redjont an arvorion hag an douron uhel da glask ar pezh a oa diouz o doare. Er bloaz 502, an tiern breizad



Rioualon, nevez diskennet eus a Vreiz-Veur e Breiz-Izel, o c'havas war e hent hag a en em lakas da stourm



outo; a-raok mont da glask o zree'hi d'o c'hastell e reas le da zvel eur chapel d'ar Werc'hez, war zouar an enezenn, ma tenje a-benn da stlepel e enebourion ouz torgen; rakal e tigoras an emgann; gwazed an Hanter-noz a voe flastret a villeron. Rioualon, evit trugarekaat Mamm Doue da veza e lakel da veza trec'h d'al laeron-ze a zavas eur chapel gant dismantron Kastell Korsold hag he gouestias da Itron Varia ar C'hallou, virgo potens, hag ar Vretoned adalek neuze a anvas an enezenn: Enez Itron Varia ar C'hallou, aenet divezatoch da veza Itron Varia Kallot pe enez Kallot.

Aruz de la Borderie, hon istorier bras, a gav abeg er marvailh-ze savet gand Albert Le Grand, rak da genta, ano Korsold, mestr al laeron, hag hini e wreg Aletha, a zo henevel mat ouz anioù diou ger goz eus a Vreiz-Uhel, Korsold hag Aleth ha d'an eil ar marvailh-se a gavomp, skrivet evit ar wech kenta, gand ligo-mar, manac'h eus a Zant Meen, e buhez sant Judikael, savet e bloavezion kenta an XI<sup>e</sup> kantved, da lavaret eo 500 vloaz bennak goude ma lie Korsold beza graet e ziskenn war aochou Leon.

Ar pezh a c'heller da gredi eo e voe, — etre tud Rioualon, roue rouaned Donnone Breiz-Veur, p'edont o klask ober o diskenn e Breiz-Izel, war dro ar bloaz 515 pe 520, hag eun toulad laeron-vor eus a Vro-Zaoz pe eus an Danemark, — eur c'hragat hag e voe goudeze savet, war dachenn an emgann, eur chapel da Vamm-Doue, gant hon tud koz, d'he zrugarekaat da veza roet d'ezo he skouzell da ziarleim enebourion ker kriz ma venent c'hoaz goude beza o stlepel, er mezh eus o bro, dont da glask trabas outo war zouar an harlu.

Ar Werc'hez a falvezas ganti diskonez, dre vuzudou, peger mat e oule difenn an aochou-ze rak, enebour ebet, abaoe an amzer goz-se, ne daolas troad dre eno. War a leverer, eun droiad, e oa eun toulad Normaned o tremen, harp e Kallot, hag edont o'ch en eun givet da ziskenn evit laerez ar chapel, met, en eun taol, diouz an noz, ar radenn a gillec an enezenn, a generas stumm brezelourien hotarnet penn kil ha troad; o welet eur seurt tra, an Normaned a dec'has heb ober gau ebet ouz eun enezenn hag a oa dioulet ker mat gand Mamm Doue. Abaoe, m'arvat, eo emañ ar c'hiz da lavaret:

Itron Varia Kallot  
Diivirit omp a Zanol.

Anat eo e karet kalz Itron Varia Kallot, en amzer gwechall, p'eo gwir aotronek Lezireur, hag a zo o



c'hastell e parrez Henvic, o doa c'hoant da zvel, war dro ar bloaz 1600, eur manati, e kichen ar chapel, da vonec'h sant Fransez da lavaret an oferennou hag ar pedennou a c'houenne ar re a deue da hardona da ar pedennou a c'houenne ar re a deue da hardona da

Gallot. Eun ti a voe savet, diwar o c'houst, evit an draze hag er bloaz 1629, ma unan eus tiegeziou brasa Montroulez, Yann ar Boisson, a-raok ober e leou a vanech, e manati sant Fransez Blois, a stagas ouz manati Kallot 60 lur leve. Ne ouezer ket, mat a-walc'h pe e teuas ar vanech da jom da Gallot pe ne deujont ket; ar pezh a zo sur, ne weler roud manati ebet e heb lec'h, ha n'eus den, en enezenn, hag en divije klevet ano anezan.

Kalz tud a vez o pardona e Kallot: Al lec'h santel-ze, a skrive an Tad Kyrill ar Pennek, er bloaz 1637, a zo darempredet kalz gand an dud bras hag ar bohl munut eus a C'horre-Leon hag eus a Vro-Dreger, daoust ma n'eo stag ouz an douar bras nemed gand eur choaser anvet ar Vali a vez truiet bender gand ar



Hiz Karanteg



mor. Tud Montroulez, re Gastell-Paol ha re Roskov a den alies da welet ar chapel-ze.

Al listri a-raok kuitañ an aber evit mont d'ar Spagn pe d'an Amerik, ar rederien vor, hag a veze o c'hedial koueza war listri saoz karget a varc'hadourez a laoske eun tenn kanol da zaludi ar Werc'hez, bep wech ma tremenet ebhio he chapel, en dra ma chome ar vor-tolodel azav ha diskabell da lavaret o Ave Maria. A-raok mont kuit ar var-tolodel a yea da gimig d'ar Werc'hez seizennou o zokou ha pa zistroent e lakent ofennou da drugerekaat Doue hag ar Werc'hez da veza o diouallet, epad an amzer dremenet er muez eus ar ger. Zoken, epad an Dispac'h, pa oa graet eur c'hazari eus ar chapel, ar hardounerien a gendalc'he da zont da bedi e-harz he mogerioù.

Eleiz a daolennou e welet warno listri o vont da goll hag a oa bet saveet gant Mamm Doue, a welet a ispiñ ouz he mogerioù; gwas peza a zo an traou-ze holl a zo bet devet gant ailioned an Dispac'h.

Bet oun eur bloavec e pardon Kallot hag en oa kemeret eur vag e Lokgwenole; eun tregont den bennak e comp enni. Dal ma oa tremenet gantomp beg Pennal-Lann, pa velomp ar chapel war he zergenn, a-zioc'h ar mor, an holl a en em lakeas diskabell da gana an Ave Maris Stella. N'oa ket kals a dra an dra-ze, mar kirit, mel kaer oa evloto da welet.

Prosesion Karanteg, diouz ma vez ar mor, a rank ober lod eus an hent, dre vag, A-wechou, stonaz, pardonerien hag o deveze evet hanoù a re, a en em gave ganto gwall zarvoudou. Al Ledan, mouler e Montroulez en deus embannet er bloaz 1845 eur Gwerz nenez ouz sujel ar mabour horrapl erruet er tud Montroulez, tost da Gastell-an-Taro, ar sul 17 eus a viz eost 1845, dez pardon an Itron-Varia a Gallot, hag a zo ano enni eus eur vag sturiet fall hag a voe goueledet hag an eiz pe zek den a oa warni beuzet.

Ar chapel savet war beg eun dorgenn, e kreiz an

enezenn, a zo graet gant mein, deuet da veleni gand ar c'hinvi a zo savet warno. An tour a zo eus ar bloaz 1671; ar pent diouz an aoter vras a zo koz ivez, met ar rest a zo bet adsavet er bloaz 1805, rak ar chapel goz, dilezet epad an Dispac'h, a venne he mogerioù koueza en ho foull. An A. Nedelec a oa neuze person e Karanteg hag an A. n Aot person Taule eo a venngas ar chapel nevez d'ar 24 a viz ebrel 1808.

Kresket e oa bet er XVII<sup>me</sup> kantved, gant Rene al Louet, chaloni Leon, a deus divizatoc'h da veza eskob e Kemper hag a lakeas staga outi, e tu an hanternoz e cur chapelig koant en emor da zant Joachim ha d'an Itron Santez Anna, tad ha mamun mamun zantel an Aotrou Doue. Eur c'hleuzer arc'hant a virer er chapel; skoued aotroued al Louet a zo warnan; rot eo bet d'ar Werc'hez er bloaz 1690, gand eur Rene al Louet all, eun ni da eskob Kemper, aotrou al Louet, Koetjunval, Penchoadig, Kerrom ha Kervellec; chaloni e voe e Kemper ha Kernitron, e Lannmeur, a oa en e garg.

A-zioc'h an aoter vras e weler eur skendenn gaer eus ar Werc'hez, he baz a rouanez, graet gand eur strollad kurunennou, stag ha stag, an eil war c'horre eben, en he dourn. E chapel an tu debou em a sant Yann Vadeour hag eur Werc'hez all stumm gosoc'h d'ez eged an hiñi a zo a-zioc'h an aoter vras. En tu kleiz e weler eur zant Roch hag eur zant Sebastian, a vez pedet pa vez klenvejou bras, hag eun daolenn li-vert warni Hor Zalver p'emaer ouz e ziskenn diouz e grouz.

War an aoter vras ez eus ivez c'houe'h kantolor arc'hant hag eur groaz eus ar XVII<sup>me</sup> kantved.

An enezenn, e tu an hanternoz, a zo begel gand eur roch vras a oa daou bet kanol warni gwec'hall goz da viret ouz listri an enebourien da vont en aber Penzez pe en aber Montroulez.

G. P.




### Dastumomp hor gerioù brezonek


Er miz tremen ho peden da zastum an holl anoioù implijet en dro d'oc'h evit henvel eul lodenn pe lodenn eus *koef an den*. Er miz-man ho pedan da zastum an holl anoioù implijet da henvel eul lodenn pe lodenn eus *dilhad an den*, koulz re ar wazed evel re ar merc'hed ha re ar vugale.

Levriou nevez ha talvoudus a roimp d'ar re a zigaso d'comp an dastumadennou kaera.

O digas a-henn Gouelioù Nedeleg da: *M. le Directeur du Feiz ha Breiz Plouguerneau* (Finistère).



## HA BREMAN, TUDOÙ, LABOUROMP !



Bugale Breiz dirak ti-ker Montroulez  
*an dra m'eman an R. CORNIC o koma outi*

Bleun Brug Montroulez a zo tremenet. Daoust n'eo bet miz gwengolo, er bloaz-man, ker fall ha miz du, pa vez en e falla, sizun Vreiz a zo bet eur zizun vat, eur zizun a ziskuz, a emgleo hag a labour.

Da ziskuz, e oa daou dra: haleadennou ha peziou-c'hoari.

D'al lun 12 a viz gwengolo, etre 70 ha 75 den, renet gand an A. Olier Chevillotte a rea tro kestel hag ilizou kaera Goue-Leon, E Kleder, e chomjont a-av, da denel eur banne dour benniget, war bez Rener kenta ar *Bleun-Brug*. A'hano ez ejont raktal da vaner Kervenguy el lec'h ma voe graet d'ezo eun digener eus ar gwella. En ano an holl, an A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz, a zaludas mestrez an ti, dre ar c'homzou-man:

IRON,

Lenn em eus graet, er bloavec 1918, e iliz ar Galon Zakr, e Nancy, war bez eun eskob kalonek an A.

Turinaz, ar c'homzou-man: « Tridal a raio va eskern, en o bez, en deiz ma tremeno, ebhio d'ezo, ar zoudarded o tistrei eus ar brezel bras, lore an trec'h war o zokou houarn! »

Bremaik, p'edomp daoulinet e-harz bez ho pried n'oa ket evit miret ouz ar c'homzou-ze da rodella em spered; tridal o deus graet ivez e relegat e gouled ar bez o welet peger he-buhezek eo atao ar *Bleun-Brug* en deus renet gant kement a habaskter hag a furnez epad e vloaveziou kenta.

Ar *Bleun-Brug* en deus anavezet an A. Gaston a Gervenguy n'en doa ket astennet nemour e skourrou c'hoaz en tu all da harzou Leon; ar *Bleun-Brug* breman a zo bleuniet e pevar c'horn Breiz hag ar gwella testen eus ar wirtonez-ze eo ar gurunennad Bretoned, a bep renk hag a bep tu, a zo deuet d'am heul hizio, da genver an eil bloavec war nugen, abaoe n'eo bet







## PRIZIOU AR "BLEUN-BRUG"

### Strolladou kanerien

#### Gant 4 mouez

Priz: Kanerien Kerber.

#### Gant 3 mouez

Priz: Kanerien Pleuvigner.

#### Gant 2 mouez

Kenta priz: Kanerien Kerber, kanerien Plestin.  
Eil priz: Kanerezed ar Folgoad, re Zant Thegonneg ha re Sant Vaze (Kemper).  
Menegou a enor: Kanerien vihan Kastell-Paol, re Zant Vaze Kemper ha re Blouzeniel.

### Kanerien a-unanou

#### Soprani (paotred)

Priz: B. Coat, Kastell-Paol.

#### Merc'hed

Priz: Kenta: An dimezell ar Moal, Rekourans.  
Eil Priz: An dimezell de Dieulevent, ar Folgoad.

#### Contralto

Priz: Kenta: An dimezell Cloastre, Kerber.

### Lennadeg ha kan ar vugale

1. Auguste Abiven, Plouzeniel;
2. Pierre Guillou, Kastell-Paol; *ex-aequo*, Marie Bideau, Plouzeniel; Maria Jaouen, Plouzeniel;
3. Brigitte Simon, Plouzeniel; *ex-aequo*, Marianne Salain, Loperch'el;
7. François Fichol, Kastell-Paol;
8. Bernadine Guillou, Plouzeniel;
9. Marie-Anne Bideau, Plouzeniel;
10. Pauline Moal, Kastell-Paol;
11. Anne-Marie Moal, Kastell-Paol;
12. Alexandrine Ledan, Plouzeniel;
13. Yvonne Guillou, Plouzeniel;
14. Paul Guimégan, St-Nouga;
15. Jean-Louis Stéphan, St-Nouga;
16. Jean Lortho, Baud;
17. Antoine Simon, Plouzeniel;
18. Louise Stourm, Plouzeniel;
19. Marie Salain, Dirinon;
20. Yvonne Foricher, Plouzeniel;
21. Paul Prigent, Kastell-Paol;
22. Marie-Thérèse Le Got, Folgoët;
23. Louis Le Gall, Plouzeniel;
24. Joseph Martin, Folgoët;
25. Gabrielle Dantec, Plouzeniel;
26. Antoinette Moal, Dirinon.

## MARI VIHAN

War don: Va zi bihan.

### Diskan

O! me gar Mari venniget!  
muio'h eget tenzoriou ar bed!  
Ha me gano a vouez uhel!  
Ye, me her c'haro betek mervel.

He daoulagad o lufr  
zo karget a joa  
evel an heol benniget o para!  
Nann, n'euz ket er bed-man  
Nann, n'euz ket, a gredan,  
eur brinsez evel Mari-vihan!

### III

Diouz an noz hag ar mintin  
e kouezan d'an daoulin  
hag e c'houennan digant va C'hrouter  
miret deomp nezh ha yec'hed  
mammenn a enrusde!  
ra zelanto pedenn e zervicher!  
Pa deui 'r maro da dremen  
e rin c'hoaz eur bedenn  
d'ann Dorn... mat 'vid ar bec'herien  
— O! Tad a vadelez  
Dihouezit trugarez  
evidon ha va c'hoimpagnuez!

FRANZIS MOAL.

## Ar gador roët ha kaset en dro

Brasa kastell a oa gwechall e Leon, e oa hep mar ebet hini Keryann. Daouzek tour bras a oa warnan ha kemend all a re vihan ma n'helle den lavaret pet a-oa anezo.

Perc'hen ar maner a oa eun denchentil pinvidik, Ronan e ano. Kalon val en doa, ha piz tannu ebet. Karet a rae an eblon ha pa c'helle c'hoarzin e oa en e vleud. Mestr-mevel ar maner a denned d'an Aotrou egiz an noz d'an dez.

Eun den kriz a oa anezan, dremmou diflemmet warnan, piz-brein gant traou e vestr, ato o vont hag o lont dre ar maner, evel eur c'hi, dilun e lagad hepred gant aon ne vije aet an diserra tra gant all laer. N'en devez morse petra da rei d'ar re all, met gouzout a rae chaacha d'e c'hodell.

An den en e zibarz a oa fall tre; krignet e oa e galon gant ar gwarizi, hag ar c'hoant dastum. Ne oa ket evit gouzav hini ebet eus ar re e selle an Aotrou outo gant teneredigez pe gant truez. Kalz eus traou e vestr a 'z ae gantan hag ar muia ma oa e chal, e oa da gaout bevaus mat ha dao neuze var ar c'hig yer, an lammoù lipous hag ar gwin koz. N'eo ket gant eur weladenn hombez e laoske ar c'ha. Sellou du a rae ouz kemend hini a denned d'ar maner, ha ne oa ket gwelloc'h evit tud ar maner o unan. N'en doa ket eur mignon ha kanaouenn vras a vije bet er maner, an devez ma vije aet pe da anao pe da glask bod elec'h all.

Eun devez, e oa merem vras gant an Aotrou. Pedet e oa da zont, intronezed, tud-chenfil, ha tud a vrezel tro-war-dro, hep ankounac'hât nikan. Ne

— Chas treut war miz, emezan, sellit outo, me zo sur n'o deus ket debret abaoe eiz dez evit karga hizio peb a govad da beurrinsa kemend begad boued a zo en ti man. Rivin ha malloz!

E oad ouz tol eur pennadig a oa, pa deus en ti eur mester, eur pofr-deneved, lor egiz ar pec'hed, rannet gantan e vleo egiz re eur marc'h-gouez. Klevev en eus e oa merem en ti-man. N'eo ket gwasoc'h d'in me dont egid d'ar re all.

Hag ar paotr da glask eur skabell da azeza. Ne oa hini goullou. Ar mestr-mevel, taeret lip, a zistagas gantan, eus e holl nerz, eun tol troad e traon e gein.

— Dal, pôtr sot, töl da bouez aze, me a ro ar gador-ze d'id evit ar pred!

Daout a reas non d'ezan koulskoude na deuje an aotrou da c'hoarzin pesurd fallon en doa graet egiz-se hag e lavaras d'eur mevel evel buan kador ha boued d'ar paotr kiz pôtr gwall vlonset e dalhier d'ezan. Youenn, hennez oa e ano, a reas van da c'hoarzin, hag a stigas da zebri gant e zaon zour evit lapa al laus kemeret gant ar re all. Echu merem, e oa kaset an holl en eur zal-vras evit an ebatout.

Lavaret en doa an aotrou rei eur zae gaer, ruz-gwad, fomm, ledan ha gouremmet eus an traon gant neud a hep seurd lion, d'an hini en dije lakat an holl da c'hoarzin ar muia. Eur gounid lrao e oa an dra-ze, rak seurt gwiskamant n'en dije ket graet divalo war gein eur Roue. Setu ma oa hec'h war ar zonerien hag ar ganerien da c'hoarzin piau a vije trec'h d'egle. Lod a gane en eur eber seiz mil drocherz gant o fenn, o daoulagad hag o drouarn. Lod all a lamme hag a zistamme gwasoc'h egid an diaoul kamm e pin-sin an dour benniget. Henman a 'n en lake egiz eun den mezo dall, hennez a rae an azen. Hag



chomas den er ger, rak an holl a ouie e vije aet mat an traou.

E gwirionez, Ronan en doa digaset snerien, kanerien, potred ar marmouzed, da lakat ebet etouez an dud. C'hoant en doa ne vije bet na penn terval na kof moan ebet, en deiz-se war e zouarou. Setu ma oa pedet ive kemend den a oa dindannan, tud chentil manut, merourien, potred-marchosi ha potred-saout, tadou koz ha lugale vihan. Dont a reas tud leiz ar maner.

N'eo ket an foliou a rae diouer, hag ar meujou war al listri. N'ouzon dare pet harrikennad chistr a vae toullt.

Lavaret peseurd penn a oa ouz ar mestr-mevel bras ne dalv ket ar boan. An holl a c'hell gouzout; ne bade ket gant ar gounnar.





an holl a c'hoarze kemend ma venent freuza o c'hoz o c'hoarzin. Met an hini a c'hoarze ar mui a Youenn, en e zav e kreiz ar zal hag eur hijadur heradoz d'ezan. Echu an troiou kannn, ar poul denved ha tostaat ouz ar mestr-mevel da vat o tivizout, gand an aotrou diwar-benn da biou rei ar zae. Droug en doa abenn neuze ar mestr-mevel ouz an hini a vije aet ar maout gantan. Re gaer e kave ar wiskaint e vid seurd tud. Den, evitant n'en doa gaset c'hoarzin an dud o gwalc'h. Epad an amzerze, Youenn a oa digonezet e kichen ar mevel bras. Distaga a reas gantan eur mestr-tol troad e traon e gein ken ma kasas e fri da beuri war al leur-zi :

— Dalit, aotrou, setu ho kador digaset d'eo'c'h d'ar ger, n'eus ket par d'an dud onest : ganto ne vez morse koll.

Pa voe gwelet ar mestr-mevel o vont d'an traon, e savas c'hoari er zal ; ar mevelien a oa dare da gregi e Youenn d'ober d'ezan e stal. Met, an denchentil a roas urz d'hen digas dirazan :

— Perak ez peus pilet va mestr-mevel evelse ?

— Aotrou, a respontas Youenn, klevet em boa

e oa merenn vras da gaout er maner hag oun deoel, pegwir e oa pedet an holl da zont. Met ar re all zo bet primoc'h o zroad. Red eo bet d'in ne goullenn eur gador digant ho mestr-mevel pa ne welen nikun goullou ken. Hag hen ken seven ha tra en deus dar'hoel gancen-me eur avell tol troad o lavaret d'in e roe ar gador-ze d'in evit ar pred. Dehret em eus hag oun deuet da zegas e gador d'ezan en dro. Hag e c'hellit gwelet, aotrou, ma n'oun nemet eur poul k'ez, oun, avat, tost d'am c'housians. Ma n'en defe ket a-walc'h koulskoude gant eur gador, e beg ma zroad 'z eus c'hoaz eun all da gas d'ezan.

N'en doa ket Youenn echuet gant e goz, ma tistagas an holl da c'hoarzin. Epad an amzer-ze, ar mestr-mevel a floura an tamm eus e gorf n'en doa pouan emman ha seurd dremmou a oa anezan, ma larze an holl muni'c'h mui...

— Mat, eme, an aotrou, n'oar ket evit kastiza Youenn ha kemend en deus hol laket da c'hoarzin, ma ne vefe ket fail rei d'ezan ar zae. Sell, Youenn, d'it ar maout !

G. M.



### Eur weladenn ho n'edod ket war c'hed anezi

Ahaoc tarz an deiz edont o daou o redet warlerc'h ar c'hadi; a vech m'io devoa kemeret amzer da choat eun tamm kreunan, da boent merenn, e korn eur park; heman, poumer o sier gand ar pez o devoa tapet, edont o sonjal distrei d'ar ger, p'en em gavas, en eun taol, eur barr-arne da skel. Chom a rejont eur pennad da zise'havi simdan eur wezem, ar yaouanka eun eur, pa ne silerae ket an amzer, ar yaouanka anezo o daou, ar mestr, diouz e zoare, a lavare d'egle :

— Ne c'hellomp ket chom aman ken; gvasoc'h gvas ez a an amzer; dizale ne vo ket eun neudenn zec'h emomp; pemp kart eur emomp c'hoaz diouz ar ger; klaskomp goudor en eun tu bennak, rak erru eo an noz.

— E lec'h ma keroc'h ez alimp, Aotrou Yvon !

— Te a anavez ar vro, Matulin, ha me n'her gran ket kaer.

— Bro va zad eo, Aotrou, ha meur a dro em eus klevet ano anezi gantan. Evelse, e c'houzon e he leza, e kreiz ar c'hoad-man, eur maner koz, hanter frenez ha demost d'ezan emman W ar merour, eur c'hristen a galon vat, war a leverer.

— D'comp d'e gaout, Tulin, ne jomo ket hep rei digor da zaou zen kollet en noz.

Matulin, sentus, a valvas a-raok, da ziskouez an hent an Aotrou Yvon a deuc war e lere'h, e gi harp outan.

Dek munut goude, e weljont, sklerijennet gand al luc'hed, koz moerion mein benerez, hanter ziskaret dirazo.

— Setu aman ar maner koz, eme ar mevel; ar veurei a vezo gwelet ivez dizale, a gredan.

N'o devoa ket gael a ugent kammed ma ehojont a-zav, en eur lez ar youc'haden embreket; stanket oa an hent; eul lenn a oa etre ar c'hoz vaner hag ar vereuri; gand an die'hann e oa dounaet ha ledanet ha pa ne outent ket e pelec'h edo an treiz edont e riski d'en eun veuzi o daou. N'hellent ket sonjal mont war o c'hiz, ken nebeud e kreiz an denvaljenn.

— D'comp d'ar c'hoz vaner-man, eme Yvon, da c'houllenn lojez ouz ar c'haouenned; eur c'horn anezan a zo c'hoaz, en e zav, evit doare; gwelloc'h e vez-zimp aze c'hoaz egeul er m'ez.

— O' mat! Aotrou Yvon, eme Dulin, evidon-me n'emaout ket kalz e chal da jom er c'hoz ti-ze epad an noz; hennez a zo brud fall diwar e benn ha...

— Te, eur paotr dispont eveldout, ez pefe aoun rak sere'hennou! Sell, d'comp dillo en disc'hla; divera a ray hon dilhad dizale.

Diouz tro an dourn e klaskjont an nor hag ez ejont ebarz.

— Goulou, da genta, emezo!

Tulin a dennas eun direnn eus e c'hodell hag a en eun lakens da denna tan. Kenta rejont pa c'helljont kaout goulou a vee sellet en dro d'ezo; en eur zal vras edont; daou ugent trostad bennak a hed d'ez ha kement all a lec'hed; a-uz d'o fennou e welen c'hoaz an



treustou dero, duet gand an amzer hag an doenn a-zioch, rak ar zolier a oa kouezet pell a oa. An doenn a oa toull, e meur a dachad; ar preneher n'oa mui ano anezo, met en eur penn eus ar zil ne rae ket a c'hlae, ar penn diouz ar simnal, hag an daon chaser a gavas lrae en em denna eno.

— En eur c'horn e weljont eur bern gouzer.

— Gortoz, eme Yvon, ma vezo freuzet heman d'ober eun tantad er simnal-man.

Ar c'hi hag an daou zen a dosteas, gand dudi, ouz an tan skler, rak krena a raent gand ar riou; pa o devoa gael eun tomm d'o izili, Yvon a lavaras.

— Daoust ha n'eus ket chomet eun tamm bara ganiz, ahaoc merenn? laket e oa daon damm d'omp a-benn hor gortozenn ha n'hou eus ket sellet outo c'hoaz hag eo mall d'omp debri koan; em c'houlourdrenn ez eus c'hoaz eur banne gwin hag hel lakaia da vont d'an traon.

— O! gela a-walc'h eo ar bara, Aotrou! debromp hen, evelato.

Setu aze eur pred diaoz, a dra zur, met digor oa ar skrinou hag ar sperejou a oa laouen, daoust d'ar gurun.

N'em eus ket a ezomm da lavaret e voe roet e damm d'ar c'hi hag eur penn kounikl c'hoaz, war ar mar-c'had.

— Ha breman, Tulin, gwella hon eus da ober eo gortvez war al leur-zi; ma c'hellomp ober eur mored he gavimp ket keit an noz.

— Ma 'm bije gell lakat eur c'horniad eo, eme Dulin; sioaz, ar butun a zo em liasenn evel an dilhad er poull!

Banez ar c'hi, lavaret mat a c'heller, n'o divije gwel-let netra eus ar pez a dremenas goude, rak kousket mort a rejont.

Wardro eun eur goude hanter-noz, e stigas ar c'hi da yudal:

— Petra 'zo, a-nevez, ganez 'ta, paotr? emezint o daou.

Digeri a rejont o daoulagad hag e weljont e penn all ar zal, eur strollad tud o lont warzu enno, gwisket evel tuchentil ar XV<sup>th</sup> kantved; dont a raent sioul ha ne glevet trouz ebet gand o boutiere ler o koueza war an donar.

Da genta e oa diou blac'h yaouank, diou vatez, evit doare, rak lavan-cherou gween a oa ganto; unan a zongze kantloriou arc'han, goulou emouet enno; eben a oa gant eun douzier lien dano hag eur banerad traou da zebi ha da eva; war o lere'h e teue daou vevel, eun daol ha kadoriou ganto.

Ha da heul e oa pemp pe c'houec'h aotrou, perrukennou war o fenn lenn a boull riz, dilhad seiz ha voutouz, broudet gand neud alouret, en dro d'ezo.

Tulin hag e vestr, difoupet o daoulagad, gand ar zouez, a zelle schezet, ouz an arvest-ze, met ne gredent lavaret ger. Pa voe savet an daol ha goloet gand ar pez a oa er baner, an aotroued a en em lakens ouz tiol hag e stagjont da zehri, servic'het gand ar vevelien. Beza o devoa kig-jejen, kig-noc'h gouez ha kig-kabon, ha gwin da eva, ha daoust d'ze ne oa ket eun uman anezo hag a vije laouen; tental e oa o fenn; frist o daoulagad; konz a raent ken etrezo, met ne c'hoarzent ket ha heb an amzer e raent eun huana-denn bir. E galleg ez aent, met e galleg koz, setu ma n'oa ket aes gouzout petra lavaret: Yvon a c'hellas tapout, koulskoude, meur a c'her; klevet a reas freas:

— Paer 'r ranker, diel eo; Anton Kallarek!

Pa oa echu o c'hoan ganto, an aotroued a gavas evit mont kuit adarre: eur zell treuzis a daoljont war ar moerjoui evel m'o divije kavet diaes mont eus o c'her, hag ez ejont endro, evel ma oant deuet, o servicheerien ganto.

Pa ne jomas mui er zal nemed an daou chaser, estlannet hag abafet gand an tol, Tulin a droaz ouz e vestr hag a lavaras d'ezan e pleg e skounar:

— Ac'hanta! n'em oa ket lavaret d'eo'c'h Breman e welen mat edo ar wirionez gant va zad, ha pen-da-benn, lavaret a rae e teue aotroued ar maner-man, aman, bep hanter kant vloaz, da ober o furkator hag er bloavez ma teuent e varve alao ar merour, eur pennad goude ma vezent bet gwelet!

— Pe seurt ano en deus ar merour, a zo breman? eme Yvon:

— Anton Kallarek.

— E ano am eus klevet ganto, neuze, hep mar ebet.

— Re strafuilhet omp bet, aotrou Yvon; amez hon divije goullennet diganto perak e teuent evelse ha mar-teze hon divije herriet o foan.

— Gwella hon eus daa ober eo pedi evito, Tulin, pa n'hou eus ket kredet ober ar pez a leveres.

O daou, gand devozion, e stagjont da heul evid an Annon ha kerket ha ma weljont o devoa tro da vont d'ar ger e kemerjont hent Montroulez.

Chouec'h sizun goude, e klevjont erbedi Anton Kallarek d'an oferenn-bred; lazet e voe gand eul loen yaouank, ar wech kenta ma oa starnet ouz ar c'har, bet o ker'chat eur gucheun baner er park. Ar c'houeze o mantras; skel a reas evel eun taol war o c'halaouen hag an dra-ze ne yeas ket diwarno; an eil hag egle anezo a jomas signac'h, etre ar c'henned hag ar yec'hed; tregont vloaz a zo abao; an Aotrou Yvon a zo bet lazet er bloavez 1914; Matulin a zo beo atao met ne blij ket d'ezan klevet ano eus ar pez en devoa gwelet er c'hoz vaner:

— Eur gwall novez eo! emezan.

TINTIN ANNA.





# Traou ha traou all

Wardro kreiz ar c'hantved diveza, eun den gwiziek eus a Voutroulez, an Aotrou A.-L.-M. Lédan, a voullas eul leorig bihan graet gantan e-unan, e ano : *Confersans curius, util hac interessant, composet evit amusanant an dud diwar ar meaz*. Plijadur a rafé marteze da eur re gouzoud eun dra bennak eus ar pezh a zo merket el leorig-ze, dies bras da gavout an deiz a hirio.

Set' amañ enn dibab eus ar goulennoù hag eus ar respontioù a gaver ennañ. Brezonneg fruilhaouek a zo war e dro. Evit chacha ar vez diwar-enn eus klasket her gwiska eun draik bennak dereatoc'h.

G. — *Pion en deus kavet ar Skritur ?*  
R. — Lod a lavar ez eo Doue e-unan, pa roas da Voyez an dek Gourc'hennenn eus al Lezenn, skrivet var diou daol vaen. Cadmus, roue Thèba, mab da Agenor, roue a Phenikia, a zigasas ar Skritur eus ar Phenikia d'ar Gres, wardro ar bloaz 1617 a-raok donedigez J. K.

G. — *Petra en deus an heol a deader ?*  
R. — Beza en deus wardro tri c'hant naontek mil heol, tost da gant unnek gwech brasoc'h eget hini an douar. Dre ze e welet ez eo an heol wardro eur million pevar c'hant mil gwech brasoc'h eget an douar. Beza emañ pevar million leo ha tregont diouzomp.

G. — *Pe geit emañ al Loar diouzomp ?*  
R. — Pemp mil ha pevar-ugent tri c'hant peder leo war 'n ugent peurveunia ; rak a-wechou e vez tostoc'h, hag a-wechou all pelloc'h. Wardro pemp gwech var 'n ugent eo bihannoc'h eget an douar.

G. — *Pe geit emañ ar stered diouz an douar ?*  
R. — Neus ket gallet her gouzoud da vad ; hogen gouzoud a rear penaos ar re dosta a zo, d'an nebeuta, pevar c'hant mil gwech pelloc'h eget an heol.

G. — *Komzit din bremañ eus a eur gavadenn bennak ?*

R. — An Tan a voe ar c'henta tra dizolot gant an dud. Set' amañ penaos

Ploa ha Ploz, mibien da Akon, eus ar c'hwec'h-veur rumm dud goude hon tad kenta, a oa o vale eun dervez war lez eur c'hoat bras, pa zigouens eur barr muer ker spontus ma stoke ar gwez bras an eil ouz eben, ha dre nerz ar stokador e krogas an tan e meur a hini. An daou zen-ze n'o doa biskoz gwelet tamm tan ; setu ma teuas en o spered e oa an dra-ze ar c'hastiz a-berz Doue. Dont a rejont en eur ouela fors da lavaret d'o zad ar

pezh o doa gwelet. Akon a yeas ganlo war al lec'h, ha ne gavjont nemet glaou maro, tomm c'hoaz evelato. Evel pa vije bet kuzuliet gant Doue, Akon a lavaras d'e vugale kemerout daou damm koat sec'h, hag o frotta stard an eil ouz egile, ha kerkent o devoe tan.

Tubal-Kain, mag Ithan da Gain, a voe ar c'henta goveler pe varichal. Hen eo a gavas an doare da labourat an houarn evit ober benvia- chou.

Noema, e c'hoar, a gavas an tu da neza ha ober lien.

Er bloaz 515, e oa graet ar c'henta milinou. (Betek neuze e veze malet gant milinou a zorn, anvet braou, hag hon deus gwelet c'hoaz pa oamp bihan).

Er bloaz 830, ar Hollandisien a gavas an horolachou. (An dra-mañ a die beza intentet eus an horolachou gant pouezioù ; rak pell a oa, unan euz pennou bras an Turked, Haroun-Al-Raschid, en doa digaset eun horolaj d'an impalaer Charlemagn ; unan dre zour oa avad).

Ar c'hleier a voe invantel, tost da Rom, wardro ar bloaz 400.

E 1440 (pe vardro) Yann Gutenberg, soudard alaman, a gavas an doare da voulla lizerennou, da lavaret eo ar Skritur moull.

Eun nebeut goude, eur manac'h a invantas ar poullr.

G. — *Komzit din eus a eur gavadenn bennak estreged ar re oc'h eus anvet d'ja.*

R. — Ar chiff arabek er bloaz.....	901
Ar c'henta lutun, eus Virginia.....	1583
Ar paper graet gant pilhou.....	1312
Al lumedou.....	1290
An telegraph.....	1792
(Al listri dire dan.....	1807)
Ar patrez.....	1827)
An dischlaverien.....	1775
Ar milinou-avel, en Normandi.....	1680
Ar spilhou.....	1105
Ar mouchoerou-gouzoug.....	1510
Ar c'hafe.....	1636
Ar chafe-chikore.....	1656
Ar bloukou ha krochedou.....	1771
Ar gweil-hier er bara.....	1680
Ar taboulinou.....	1147
An nadozioù.....	1545

G. — *Roll d'in da anaot seiz Barzud ar bed.*

R. — (Set' amañ eun diverradur anezo) :  
1<sup>o</sup>. — *Ar Volz kaer* a lakeas Arthemis da ober d'e

fried Mansol, e kêr Halikarnas. Ar pezh kaer-ze en doa pevar c'hant unnek troatad tro, ha seiz ha tregont troatad uhelder. « Nag a arc'hant froet e mein! » a lavaras unan bennak ouz e welet.

2<sup>o</sup>. — *Templ Jerusalem*, savet dre urz ar roue Salomon. Ne welet ennañ a hep tu nemed aour, arc'hant, mein a dalvoudegezh vras. Seiz vloaz e voed oud e zavel.

3<sup>o</sup>. — *Templ Diana*, eun douez faos, en Ephes. Bez' en doa pevar c'hant pemp troatad war n-ugent a hed, ha daou c'hant ugent a led. Distrujet e voe er bloaz 356 a-raok Jezuz-Krist, gant Eroos tra. Henmañ evit lakeat an dud da gomz diwar e benn, a lakas an tan en templ : pevar c'hant vloaz oad bet oud e zavel.

4<sup>o</sup>. — *Mogerion Babylon*, savet dre urz Nabuchodonosor, hag o doa seiz troatad ha pevar-ugent a led, tri c'hant hanter-kant troatad a uhelder, hag ugent leo a dro. C'hwec'h karros bras a c'helle tremen warnezo tal-ouz-tal, heb ober dies an eil d'egile.

5<sup>o</sup>. — *Skeudenn Jupiter*, e Pisa, er Gres, en aour hag olifant, war eun tron eus an hevelet danvez.

6<sup>o</sup>. — *Skeudenn Apollon*, e-tal porz Rhod. Ken uhel oa ma tremene al listri, o gwelou displeg, etre e rampou. En arem ou grael, da lavaret eo e komev teuzel boueziet gant stead. Distrujet e voe gant eur c'hren-douar, 225 bloaz a-raok Jezuz-Krist.

7<sup>o</sup>. — *Pikernou* (1) an Ejipt, savet gant ar Pharaoned. Tri a zo anezo. An hini brasa deus c'hwec'h kant a kammed a uhelder, ha seiz kant kammed a led eus peh tu. Eno e voze lakel rouaned an Ejipt hag o zad, goude o maro. Dirak ar re-ze eo e lavaras Bonapart : « Soudarded, diwar lein ar pikernou-ze, ez eus pevar mil bloaz o sellet ouzoc'h ! » A-walc'h oa ar c'homzou goulo-ze evit rei nerz-kalon da zoudarded « ar C'haporal bihan ».

G. — *Goude beza diskleriet d'eomp ar Barzudou bras, komzit d'eomp bremañ eus ar Barzudou bihan.*

R. — 1<sup>o</sup>. — Er c'houezekvet kantvet, Per Alumnus, manac'h italian, a skrivas ar Gredo hag an Aviel diweza, war eun tamm paper, ha n'oa ket brasoc'h eget eun diner.

2<sup>o</sup>. — Eun den all a ginnigas da Elisabeth, rouanez Bro-Zaoz, eun tamm paper eus ment eun ivin, hag a oa warnañ skrivet Gourc'hennennou Doue, ar Gredo, ar Batez, ar niz hag ar bloaz.

3<sup>o</sup>. — Jeron Fabo, beleg italian, a reas eur pezh labour, e beuz, hag a skeudenne an oll misteriou eus a Basion Jezuz-Krist, hag a c'helle beza dastumet holl en eur graouenn gelvez. — Graet en doa ivez eur c'haros eus ment eur c'hreunenn winiz, hag e welet ennañ eun aotrou hag eun itron, eur mevel o vleina ar c'harroz, ha kezeg oc'h e chacha a-raok.

4<sup>o</sup>. — Eun den ijinnus all en doa graet eur garioleñ olifant hag a c'hellel da guzat dindan diouaskell eur gelienenn.

5<sup>o</sup>. — Eun aotrou, e Paris, en doa graet eur c'harros hag a oa chachet a-raok gant... c'houenn.

6<sup>o</sup>. — Paul Colonies a lavar beza gwelet eun

aourfebrer e Moulins, hag en doa staget eur c'houenn beo-huezek gant eur chadenn aour he doa hanter-kant meil hag a boueze nebeutoc'h eget eun haden winiz.

G. — *Pe geit e vev peurliesañ an anevled ?*

R. — Ar gwennañ a ver.....	1 bloaz
An alchveder.....	15 ha 18
An azen.....	26 ha 28
An ejen.....	19
Ar c'hote.....	30
Ar vloc'h.....	29
An danvadeg.....	12
Ar gaspern.....	100 ha 150
Ar c'haz.....	18
Ar c'hi.....	22 ha 28
Ar marc'h.....	25 ha 40
Ar c'hilhog.....	20
Ar yar.....	100
Ar vran.....	100
An touezg.....	ouspenn 100
Ar c'houmkl.....	8 ha 9
Ar c'had.....	7 hag 8
Al louarn.....	15
Ar penmoe'h (respel deoc'h).....	26
Ar filip.....	12 ha 15
(An eostig.....	10)
(Ar voualc'h.....	12)
(Ar goulm.....	10)
(Ar goukou.....	32)
(Ar peroked.....	100)
An olifant.....	200
(Ar c'hribil-vor.....	40 hag 50)
(Ar morvare'h (ba-leine).....	meur a gant vloaz

G. — *Pehini eo roue al Lapoused ?*

R. — An erer (1), abalamour d'e nerz, d'e herr, Diouz a leverer ez euz triuaskell troatad euz eur penn d'ar penn all eus e ziouskell pa vezont dispak. Beza ez eus hag a gas ganlo denved ha zoken bugale da zibri en o neiz. Eun den diwar ar meaz a lazaz a dnoùt meun eun erer hag a loa o klask sanna eur bugel pemp bloaz.

Pa edot o tibaha eur roue evit al laboused, e voe lavaret e vije lakel da roue an hini en dije nijet an uhela. Al laouennag paour en em lakeas ive war ar renk. Allaz, bunn e skuzias. Hogen, en e gorrig bihan en deus eun ijin vras. Pa welas n'helle mui heul ar re-all, setu hen oc'h en em lakant sioulk war gein ar erer. Hemañ, goude nijal kuzt uhelloc'h eget ar re all, a zistroas da zellet kuzt gant disprij, hag a yeas pelloc'h c'hoaz.

Abenn an amzer kouskoude e teuas ive da skuzia, hag e lavaras outañ e unan : « N'hellan mui ; red eo din diskenn. » Al laouennag pa glev an dra-ze, a gemer e nij, hag a lavar d'an erer, gant eur vouez goapaüs : « Pennaos, lochore 'z ac'hannout, n'out ket evit va heul ? Me ia da vont betek al loar, » Neuze ec'h en em lakeas adarre war an erer, heb gouzout dare da hennañ ; hag e teujont d'an douar. Al laouennag, kemeret gantan e nij eun nebeud a-raok, ne erruas etouez ar re all nemet an diveza. Hag hen da c'hopal a bouezig e benn : « Din-me ar goumid ! ha c'hoaz n'ouñ

(1) An erer : l'adulte.

(1) Pikernou : pyramides.

ket skuiz ! » Ne voe ket lakeat da roue, na petra  
'ta ; met anvet e voe Roue bihan, e galleg : Roi-  
telet. — Alies e vez gwelloc'h ijn eget nerz.

G. — *Komzit d'in eus eur Breton kalonek ben-  
nak.*

R. — Re am befé da ober, ma ranken henev  
an holl Vretoned o deus diskouezet e peb amzer  
eun nerz kalon dispar. Ne hanvin nemet nebeut :  
Portznoger, Duguay-Trouin, Guichen, Du Coué-  
dic, Lacrosse, Cornic, Surcouf, Bisson, war vor ;  
La Tour d'Auvergne... var zouar. Eur ger ben-  
nak divar henn Bisson, hag a zo dres ano anezan  
en deizou-man. Er bloaz 1828, Bisson a oa mestr  
war eul lestr hag a oa ennan forbaned, da lavaret  
eo laeroun-vor, chadenmet. En eun taol e sail-  
las vartan tri lestr preizerien (corsaires), dek den  
ha triugent war bep hini. Bisson n'en doa nemet  
pevarzek a dud. Hogen evit-se ne droas ket e  
dalarou. Pa velas e sailhe ar forbaned da grapa  
en e lestr, ha ne chome gantan nemet nao mar-  
toloed, e lavaras dezo savetei o buhez, rak evitan  
en doa lakeat en e benn lakeat an tan en e lestr  
ha sailha gantan er vann kentoc'h eget en em rei  
da eur seurt tud. Mil hoan en doe o'h o lakeat  
da zenti ; holl emezo, e varfjent war eun dro  
gant. Prest koulskoude e lec'hjont holl, ha ne  
chomas er hours nemet Bisson hag e loman, Tre-  
minlin. Heman, kounnaret oud ar forbaned ha  
leun a zoujans hag a garantez evid e gabiten, a  
ra le da vervel gantan Lakaat a ra e zorn en e  
hini, ha Bisson gant an dorn all a laka an tan er  
poultr. KerKent e klevet eun trous spontus : al  
lestr a zo silapat er vann, bruzelet, ha Bisson a  
ya e goueled ar mor : biskoaz ne voe kavet e gorf.  
*Tremintin, evel dre virakl, a voe strinket war  
bord an aod, brevet ha machagnet oll. Eno ive  
e voe distalet dek ha triugent eus ar forbaned,  
hag a oa bet laz.*

KerKent ha ma klevas ar ministr ar pez a oa  
c'hoarvezet, e tigemmas da Dremintin mont d'e  
gant pa vije ya'h a-walc'h. Tremintin a yeas  
kerkent ha ma voe pare, ha digemeret e voe evel  
den kalounek. Ar roue a roas d'ezan merkou kaer  
eus e vadelez.

C'hoar Bisson he devoe pemp kant skoued  
ar bloaz epad he huez. Bisson a zo bet savet  
dezan eur skouenn en Oriant : a'hano oa gini-  
dik (gwiroc'h e vije lavaret oa bet ganet e Gemene).  
Tremintin a oa eus a Enez-Vaz.

G. — *Ha ne 'z eus ket bet ivez merched a galon?*  
R. — Evel evit ar gwazed, em he kalz da hen-  
vel ; ne gomzin nemed eus a ziou.

Er bloaz 1522, ar Zaozon o veza kemeret  
Montroulez dre draituret, a laere hag a laze  
tud kear. Eur plac'h a gampr euz ar Ru Vraz,  
chomet he-unan en ti, a zastumas ganti m'ere'hed  
all ; hag o veza digoret skouitih ar c'haio, a oa

doan ha leun a zour, e laoskas an nor gour-zigor.  
Ar Zaozon a zirede a strollad, hag a goueze er  
c'haio an eil war egile. Ouspenn pevar-ugent a voe  
beuzet evel-se. Da henn an amzer, an ti a voe  
kemeret. Ar plac'h a dechas d'ar c'halatez gant  
he c'henserteuzed. Ar Zaozon a bignas war he  
lerc'h, he fakas hag he stlejas war leuz-vaen ar  
ru. Pebez koll, n'eo ket bet dal'het hano ar  
plac'h kalonek-se !

Epad n'edo ar Zaozon o laza tud ar Ru-Vraz,  
an Aotrou Lamés, beleg-provost 'iliz ar Vur,  
goude beza premet an noriou war e lerc'h, a  
bignas betek gardou an tour ; hag a'hano, gand  
eun arkebuz (eur fuzuilh euz an amzer-ze) e  
tenne start war ar Zaozon. Ar re-man a rankas  
lec'het betek ka'e Treger. Eno ez eus eur feun-  
teuz hag a zoug hirio o hano, abalamour ma voe  
distrujet el lec'h-se eiz kant anezo gant Montrou-  
lezis o listrel diouz four Wengamp. Dour ar feun-  
teuz a voe ruziet gand o gwad.

Kastell Montroulez, kel'het gand an ene-  
bourien, n'en doa mui a vevas. Jeneral an ene-  
bourien o c'houzoud edo deuet he zermen da  
wreg ar gouarnar, an itron a Rosampoul, a reas  
teuler d'ezi a bep seurt meuzou mat. Hogen an  
itron a lakeas o disteuler er mez, en eur lavaret :  
« Ar pez a zo mat evit va fried hag evit ar zou-  
darded, a zo mad a-walc'h evid-eme ivez. »

G. — *Petra eo biuidigez ar Vretoned ?*

R. — Ar Vretoned a gar dreist peb tra ar reli-  
jion. Digemer mad a reont d'o nesa. A hent all  
e lamaller da galz e karont eo o bann, ha n'int  
ket kompenn a-walc'h. Ar pez a eston kalz a dud  
eo gwel'et pegen dies oar azezet ouz taol ; evel pa  
ve dies kavoud eur skoun kompenn evit beza  
uhel a-walc'h ha tost a-walc'h ; en doare-ze e  
kel'het lezel ar skudell war an daol, e lec'h he  
dele'her etre an douarn. Ar gizou koz a ra ive  
kalz a c'haou. Set' ama em dra etouz kalz traou  
all. Ne c'hoant'er ket lakeat gwez avalou, gant  
aoun da veza laeret ; hep sonjal penaos amezeg  
an hini a blañfe gwez avalou, o welet en defe  
hennan kalz gounid, a deufe ive de dro da  
blanta e-unan ; hag an eil e serr egile o defe ar  
bljadur da gont eur banne chistr d'o fred, ha  
da d'err o zec'het epad labourou mat an euz.

Eur c'hustum louz eo c'hwera ar fri gant ar  
bizied, hag eva war lerc'h eun all hep skarza ar  
picher pe ar skudell. An doujans a deer da  
Zoue a dlefe miret da skopa en iliz. Ar c'hiz fall  
da lezel a bep seur loustoniou wardo an ti a zo  
penn-ahag da galz a glenvejou hervez an oll vedis-  
ined. Ober a dlefet skiberiou evit dastum an ed,  
en aoun a c'haio, e lec'h o lezel en dram. Nag a  
gollou a vez graet abalamour n'en em generer  
ket mad a-walc'h war gement-se !

YANN KOSTARREUN.



### Kenteliou war al labour-douar

#### Penaos miret mat ar gwiziz

An ed, eur wech krazet mat, a vez lakeat en ire'hier  
pe daolet, en eur bern, war ar zolier.

An ed a vez lakeat en ire'hier a rank beza kraz mat  
rak anez da ze e leunie da louedi ha ne dalvesfe mui  
netra.

Pa vez ledet an ed war ar zolier, e vez esoc'h o flin-  
val, gand ar bal, d'o dizec'ha.

Red eo diouall an ed diouz an amprevaned ha diouz  
al logod hag ar razer. Kaout a raer kizier en liegeziou,  
met alies e reont muioc'h a zrong eget a vad rak ober  
a reont o louz stomez an ed ; ar gripedou da baka logod  
a ra tost kement a vad hag ar c'hizier.

Ouz ar razer ez eus chas bihan hag a zo mat kenan.  
Mar d'eo lakeat an ed en ire'hier dero kempennet  
mat e vezo dies kenan d'al logod mont eharz. Postou  
an arch a vezo kilhet, diouz an traon, gant zing ; ha  
neuze al logod ne vezint ket evit pignat da vont en  
arc'h.

Daou amprevan a zo hag a ra gaon ouz an ire'hier :  
an oz (pe ar c'hozan) hag ar minouch. Ar c'hozan a  
zo eur valafenn vihan a nij en abardnez hag epad an  
noz ; ne ra droh ebet dreizan e-unan, met e brev  
avat a zebr ar greun en eur o slaga gant neudennou  
henev ouz re ar gwad kinnid. N'eo ket dies gwel'et ez  
eus ozed etouez ar gwiziz rak stag e vez ar greun ken  
etrezha ha gwel'et a raer en o zouez, bouloù du ha bihan,  
ha n'int netra ken nemet kao'h ar preny.

Evit miret ouz an amprevaned-ze da ober re en holl  
a c'haou, gwella a zo da ober eo amprevan bihan, kar tost d'ar  
c'hoani ; tri milimetr hirder en deus. Beva a ra er  
goav e toullou ar mogerou hag e garanou an ire'hier.  
En em ziskouez a ra e miz ebrel. Neuz ez a da zoff eur  
vi e pep greunenn ed. Eiz dervez goude e vez gwel'et  
eur preny bihan o tont eus ar vize. Ugent-dervez goude  
eman debret gantan ar c'heunenn a-bez nemed ar  
c'heoc'henn. Dof a ra a-nevez an amprevaned-ze en eur  
c'heunenn all. Eur barez a ro evel-se 6.000 amprevan  
en eur bloaz.

Evel ouz an ozed, mat eo ivez devi soufr en ire'hier,  
da laza ar minouched a zo enno, a-raok lakat ed enno.

#### AR SEGAL

Ar segal a zo eun ed eus ar dalvoudusa hag esoc'h  
da gaout kalz eget ar gwiziz. Ar segal a ro cost puilh  
en douarot dister, skav ha trezak. En douarou a blij  
d'ezan, ar segal a ro kement a c'heun hag ar gwiziz  
ha muioc'h a golo.

Ar greun segal a zo mat kenan da lakat etouez ar  
gwiziz da ober lara. Ya'h hoo'h eo ar lara segal eget  
ar lara gwiziz. N'eus netra gwelloc'h d'an dud o de-  
vez kalede-kof eget debri bara brazed.

Ar segal a zo mat ivez da rei d'ar c'haial. Malet ha  
mesket gant dour, (ar blend hag ar brenn en eun  
douezenn), e ra mil vad d'ar zaout.  
Segal pouz a zo mat da rei d'ar m'oc'h. Arabad eo rei  
re a segal, koulskoude, er miz diveza a-raok laza ar  
m'oc'h lart, rak bouk hag eolek e vefe ar c'hig.

#### Ar gouennou segal

N'eus ket kement a ouennou segal hag a ouennou  
gwiziz.

Ar re genta en o zouez eo :

Ar segal Shlonsted a ro cost founnus, kolo hir ha  
teo : eur ouenn mat tre.

Ar segal meurza, a vez hadet e miz meurza.  
Ar segal meurza gwellaet a ro muioc'h a c'heun hag  
a golo.

Ar segal rampsel goav, puilh ha prim.  
Ar segal goav (seigle tempete), eur ouenn segal ne-  
vez graet gant Vilmorin hag he deus kolo berr, eas da  
droc'ha ha da zourra ha ne deu ket da stoka, gwel'et  
ebel koutz lavaret, puilh e greun. Ar segal-man eo ar  
re wella evid ar re n'o deus ket a c'hoant da gaout  
kement-se en holl a golo.

Evel evid ar gwiziz, mat eo hada segal dinabet, dres  
rummajou, (*selection génétologique*) ; kalz founnusoc'h  
e vezo an cost. Komzet hon eus c'hoaz diwar an di-  
had, dre rummajou, p'hou eus komzet eus ar gwiziz.

An dha ne grog ket er segal ; n'eus exomim ebet ela  
d'o louzaoui a-raok o hada.

#### Pegouiz hada ar segal ?

Red eo hada ar segal kalz abretoc'h eget ar gwiziz.  
Ar segal hadet diwezat a ro muioc'h a c'heun, met  
sturoc'h eo o hada abred. Miz du eo ar gwella miz evid  
hada ar segal.

Evel evid ar gwiziz arabad eo hada ar segal war an  
douar nevez troet ; gwelloc'h eo gortoz pennek der-  
vez abarz lakat an had en douar.

Arabad eo hada ar segal pa vez fall an amzer ; see'h  
e rank beza an douar : « Had da segal en douar poult-  
trek ».

Ar segal n'int ket ken figus hag ar gwiziz hag o hada  
a c'heller goude n'eus fors pe seurt cost ha zoken segal  
goude segal ; koulskoude, da gaout segal mat eo  
gwelloc'h o gounid goude hoad c'haial. — ruz, ra-  
bez, karrotez, patatez hag all. — bet tempset mat pe  
c'hoaz goude melchen.

#### Temps ar segal

Evel an eostou all, ar segal a dle beza tempset a-  
zoare ; goude eun cost tempset mat, evel varletoc'h ar  
boudet c'haial, 100 lur azot soudek ha 300 lur gao'h  
houarn pe super, dre rerev arat, a zo eun temps mat.  
Mar d'eo ditemp an douar, mat e vez peli teil d'ezan ;  
met red e vezo avat douara an teil peli a-walc'h  
a-raok hada evit rei amzer d'an douar d'en em galedi,  
eun lamnig.

Hadet e vez ar segal evel ar gwiziz ; koulskoude,  
arabad eo o douara-re. Evelse n'eo ket mat hada d'ind-  
an ar homm ; gwelloc'h eo kalz, hada gand an hade-  
rez pe gand an douar ha rei goudeze daou daol freuz-  
ziou. Pa vez sech a-walc'h an douar arabad ankou-  
ma'haat d'her c'harna (roulourat) gand eur c'harn  
(roulour) pouner.

Pa deu an nevez amzer eo mat freuzia ar segal evel  
ar gwiziz d'o lakat da ober skouron ha da laza al  
louzere fall a zo en o zouez. Goude an taol freuzio  
e vezo red kiana an douar adarre.

#### Klenvejou ar segal

Ar segal a vez taget gand ar mergl, met n'int ket  
ker kizidik hag ar gwiziz.

Ar gwasa klenved a dag ar segal eo ar piger, da la-  
varet eo eul louenn savet diwar gebel-touege bihan  
a veve greun ar segal, o deir hag a lak en o lec'h eur  
c'horn da henev a-walc'h ouz eil eur c'hilgob.

FEIZ HA BREIZ

Fall eo d'an dud debri bara segal taget gand ar peger ha gwas peza zo n'anavezet louzon ebet en e gwell tra a zo da ober eo dastum gand an dourn an lamouezennou pigeret.

AR C'HERC'H

Eun ed talvoudus kenan eo ar c'herc'h. D'an dud, ar yod kerc'h a zo eur vagadurez eus ar c'henta, gwaman, gwelloc'h, skanloc'h ha krenloc'h eo eged ar yod gwiniz du; eun tammig eo diesoc'h da ober ha pelloc'h da zoza ha setu perag e kav gwelloc'h ar mer-c'hedi diegus ober yod gwiniz du eget yod silet. Gaou bras a reont, oc'h ober ar peza reont, ouz yec'hed holl dud o zi.

Evid ar chatal, an holl a oar peger mat eo rei kerc'h d'ezo. Ar c'herc'h a en em blij e n'eus fors pe seurt douar; n'o deus ket a aoun rag ar sechor; al louzeier fall ne reont ket kement a zroug d'ezo ha d'an edou all; n'eus ket a ezomm da labourat ker mat-se o douar d'ezo ha dont a reont mat a-walc'h e douarou kempennet fall.

Gouennou kerc'h

Diou ouenn kerc'h a zo: ar c'herc'h goanv a vez hadet en diskar amzer hag ar c'herc'h meur a vez hadet en nevez amzer.

Eloez ar c'herc'h goanv, kerc'h ar vro, anvet c'hoaz kerc'h du-vean goanv eo ar gwella, nemed en o zouez ez eus c'hoaz meur a zeurt; red eo kemeret eur ouenn dilahet mat.

Kerc'h du ar Beljic ne vez ket gounezet kalz anezo c'hoaz dre amant; kalz duoc'h eo o greun eget re ar c'herc'hou all.

Kerc'h meur

Kerc'h Sigowo. Kola hir, krenv ha teo; greun gwenn, teo a-walc'h o c'hroc'henn; gouenn mat hag a ro costou puilh e douarou tempset a-zoare.

Kerc'h Steger, eur ouenn kerc'h eo hag a zo denet diwar eun dibab eus kerc'h Sigowo; n'eo ket ken teo kerc'hien o greun hag hini ar c'herc'h all hag evelse eo gwelloc'h da rei d'ar chatal; rei a ranker d'ezo douarou gwelloc'h ha kempennet piseoc'h eget d'ar c'herc'h Sigowo.

Kerc'h glo aour; greun melen aour; hir a-walc'h o c'holo; eur ouenn vat a-walc'h evit douarou mat.

Kerc'h Schrihaux, greun du; graet eo bet ar ouennman gand an A. Schrihaux, o viza kerc'h Sigowo ha kerc'h Bri a gomzomp anezo pelloc'hik. Menenni a roer d'ar c'herc'h-se met evidoun-me n'oun ket bet gouest tro ebet, da gaout eost mat diwarno ha, war va menno, ne dalvezont netra.

Kerc'h ar Bri. Kerc'h du eo ar re-man; n'int ket figus na war o douar, na war o zemp. Stoka a reont buan a-walc'h.

Laket e vez peurliesha kerc'h goude gwiniz ha peurliesha ivez ne vez ket tempset an douar, rag ar c'herc'h trevaion all. Koulskoude mat eo rei; eur guc'henn ludu a oar suna ar restachou lempa a jom eus dilec'h an d'ar c'herc'h; daou c'haad li lur wano dre zervez arat pe kant lur super ha kant lur azot soudek a zo mat.

Tremp azotek a blij kenan d'ar c'herc'h ha digollet mat e vezoec'h ganto pa denio an cost.

A-wechou e laker kerc'h warlerc'h melchen; n'eo ket eur c'hiz fall hag costou mat a daper evelse.

Pegoulz hada ar c'herc'h?

Ar c'herc'h goanv a c'houlenn beza hadet abred evit ma vezo krenv a-walc'h da herzel ouz ar rion. Miz du eo ar miz gwella da hada ar c'herc'h goanv.

Ar c'herc'h meur a zo mat ivez o hada abred, adalek an hanter eus a viz c'houevrer betek fin miz meur.

Hadet e vez alies a-walc'h ar c'herc'h dindan ar freuziou; ar c'hiz gwella eo a gredan, rak ar bini ne reont ket kement a zroug d'ar c'herc'h ha d'ar gwiniz. Hadet e vez a-wechou all ar c'herc'h dindan ar bomm, met ar c'hiz-se ne blij ket d'in rak re zoun e vez laket an had. Gand an haderec e raer labour vat hag eur c'hart nebeutoc'h a had a zo ezomm eget pa hader gand an dourn.

Evel an edou all, mat eo freuzia ha krana ar c'herc'h d'an nevez-amzer, da zilaseta an douar ha da lakat ar c'herc'h da vranka.

A-wechou, pa vez re zrus ar c'herc'h e laker ar zaout warno, e miz c'houevrer pe e miz meur; n'eo ket eur c'hiz fall, pa ne lezer ket re hir ar chatal warno ha pa ne vez re volk an douar.

Al louzeier fall a ra nebeutoc'h a zroug d'ar c'herc'h eget d'an eostou all; a-walc'h ha re endeeun a reont evelato. Gwella a zo da ober eo teurel warno dour trenk soufrec pe gouevr soufrec.

Klenvejou ar c'herc'h

Ar falla klenved a c'hell koueza war ar c'herc'h eo an intr pe ar mergl. Abaoe eun nebeud bloavezio, ar c'hliedved-se a ra eur gaon spontus. Eul louedenn eo hag a zo graet gant kehell-tousegi munut hag a vev da genta war an evor hag a lamm goude war ar c'herc'h. Evit stourm ouz ar c'hliedved-se e vije red diframma an holl evor eus ar c'hoajou, met n'eo ket aes; gwella a zo da ober eo kemeret gouennou kerc'h krenv a-walc'h da herzel ouz ar c'hliedved.

Kerc'h ar vro a zo kizidik tre; kerc'h meur du a zo ivez; kerc'h Sigowo ha Steger n'int ket; taget e vezo a-wechou koulskoude.

Anaout a ran e kichen Lokouman-Leon, eun tiegez hag a zo bet gounezet ennan kerc'h ar vro ha n'int ket bet gwall daget gand ar mergl. Kaout a vo graet sur a-walc'h, gouennou kerc'h krenv a-walc'h da enebi ouz ar vosen-ze.

OLIER CHEVILLOTTE.

Berniou traou chomet eus a zilerc'h an Amerikaned, ar c'hallaoued hag ar Zaozon. Bouteler, dilhajo, mezer, lien, menil, gwelloc'h, pallennou, linelloc'h, golo'evrou, maktasennou hag all. Ar varc'hadourez a bretoi a vezo haset d'oc'h d'ao kfr. TI LE CORRE an ti a zo och ober korn etre ar ru branda hag ar ru Victor-Hugo, harp ouz ha Saut-Milaet VREST.

Gouennit e ti ar marc'hadour ar Zoavon e galleg « Le Plus Chic » Hannez eo ar gwella!

Entreprises J. PLOUE - J. COLLIERE 36, rue de Siam J. PLOUE 57, rue de Traverse BREST Deménagements - Camionnage - Transit - Transports BREST Cadres - Wagons - Autos Capitonnées R. C. Brest, 60 Ad. Tel. Ploù-Brest Tel. 0-30

Evit beza asuret mat, en em adresit LE NORD evit loc'h holl asuransou ar vrez, an tan, an darvoud hag all. BOUCHE-PILLON ha LE GALL, 1, ru Victor-Hugo, BREST, e korn ru Paris. (Komet e vez brezoag).

Klanvourien! An efedusa eus al louzeier da grenaat ha da buraat ar gwad eo al louzou diwar lodmor ha raz-eskern. Hogen eus an holl louzeier diwar lodmor ha raz-eskern — stank an niver anezo — ar reisa hag an efedusa dre ma teu war-eeun eus ar bezin-mor hag an eskern fresk eo, hep mar a-wel d'an holl, an ULMINUCINE MOREUL, al louzou gal-loudek-dreist, anavezet dre-holl e Breiz hag en deus saveteet kement a vuhezio prizious.

Statiou Nevezioù Bras Aux Galeries Saint-Martin 108 à 112, Rue Jean-Jaurès KOANTA NEVEZIOU GWELLA PRIZIOU Kavet e vez dilhad graet, en awans, ha graet e vez, goude kemeret ar vent; dilhad nevez evid ar wazed hag ar bootred gouzant. DREIST EVID AR MEZERACH DU HAG A LIQU Evit an dud diwar ar maez.

Mammou tiegez, ha d'oc'h bugale blinik, disliw, fall da grenaat ha diwezat da greski, ne maez ed-ales d'oc'h d'oc'h, a eod-treun.

AUX DAMES DE FRANCE 85, 97, 99, Straed Siam, BREST

EUN ESKOP NEVEZ Gouennant ar Japan a zo o paouez trugarekaat H. T. S. ar Pab da veza bet ar vadelez da henevel da eskob e Nagasaki, eur beleg hag a zo gimidik eus ar vro. An A. Hayasaka, an eskob nevez, a vezo ar c'henta japanad kavet gouest da veza e penn eun eskopti; sakret eo bet e Rom, e iliz sant Per, gand ar Pab e-unan, d'an 30 a viz Here diweza.

TRABASERIEZ STRASBOURG E miz Meur diweza, eul leanez, hag a oa oc'h ober skol e Strasbourg, a varve. Eun all, eus an heveleg urz ganti, a voe kaset raktal en he lec'h. Met ar C'houarnant n'eo ket o klask gwelet leanezed eo emma... Ne baesa ket ar vestrez-skol nevez ha goude an eost, en he lec'h, e kasas diou... diou diouz e zour... ha n'eo ket leanezed int e c'hellit kredi. An A. 'n Eskob Ruch en deus skrivet d'an A. Poincaré, met an Aotrou-man hag a gav amzer da vont da velet kurni penn ar skrivagner hulur Zola, d'ar Pantheon, ne diaz ket respont da eskob an Alzas.

Estour, — merch nevez neuz-oueg gwened, — eus a Bloemour, a zo bet eureujet e Ploemeur d'an 11 a viz Here diweza.

Bennoz Doue ha santez Anna war an dud nevez!

PERSONED NEVEZ An A. Gouennec, kure Itron Varia 'r Wir Zikour a zo bet anvet da berson e Loc-Envel er miz tremen. Hea eo oberour « Dre ar bedenn » pe « Jenovefa » ar peza kaer a zo bet c'houriet e Montroulez gant Merched Douarnenez d'ar 14 a viz Gwengolo. An A. Clisson, kure Ili-veur Landreger a zo bet anvet da berson e Ploumerin. En deiz ma voe lakat, en e garg, e lennas, e brezoag, — eun nevezint, sur a-walc'h, — ar Gredo a die pep person nevez lenn araok kemeret stur e barrez. An A. Clisson eo oberour an Ankeleker ar peza farsus bet c'houriet e Montroulez gant c'hourierien Ploumerin d'an 13 a viz Gwengolo. D'ar bersoned nevez a ra enor da Vreiz, gand o skridou brezoag, Feiz ha Breiz a ginnig he doujans hag he gourc'hemennou!



FEIZ HA BREIZ

Fall eo d'an dud debri bara segal taget gand ar piger ha gwasa peza a zo n'anavezet louzou ebet en e c'neb; evit mrouz ar c'hlenvel d'en em asenn gwella tra a zo da ober eo dastum gand an dourm an tamouezennou pigeret.

An apotikerien a brent an tamouezennou pigeret ha priz bro zoken a lakot enno.

AR C'HERC'H

Eun ed talvoudus kenan eo ar c'herc'h. D'an dud, ar yod kerc'h a zo eur vagadurez eus ar c'henta; gwas peza a zo ne vez ket graet a-walc'h anezan ken breman. Gwelloc'h, skanoc'h ha krenoc'h eo eget ar yod gwiziz dur; eun tammig eo diesoc'h da ober ha pelloc'h da soza ha setu perag e kav gwelloc'h ar m'erc'hed diegus ober yod gwiziz du eget yod silet. Gaou bras a reont, oeh ober ar peza a reont, ouz yec'hed holl dud o zi.

Evid ar c'hatal, an holl a oar peger mat eo rei kerc'h d'ezo.

Ar c'herc'h a en em blij e n'eus fors pe seurt donar; n'o deus ket a zonn rag ar sec'hior; al louzeier fall ne reont ket kement a zroug d'ezo ha d'an edou all; n'eus ket a ezomm da labourat ker mat-se o donar d'ezo ha dont a reont mat a-walc'h e donarou kempennet fall.

Gouennou kerc'h

Dion ouenn kerc'h a zo: ar c'herc'h goanv a vez hadet en diskar amzer hag ar c'herc'h meur a vez hadet en nevez amzer.

Elozev ar c'herc'h goanv, kerc'h ar vro, anvet c'hoaz kerc'h du-wenn goanv eo ar gwella, nemed en o zonev ez eus c'hoaz meur a zeurt; red eo kemeret eur ouenn dibabel mat.

Kerc'h du ar Beljik ne vez ket gounezet kalz anezo c'hoaz dre anan; kalz droc'h eo o greun eget re ar c'herc'hou all.

Kerc'h meur

Kerc'h Sigono. Kolo hir, krenv ha teo; greun gwenn, c'herc'hien gouann mat ha...

Laket e vez peurliesha kerc'h goude gwiziz ha peurliesha ivez ne vez ket tempet an donar, rag ar c'herc'h trevajan all. Koulskoude mat eo rei eur gouenn ludi a oar suna ar restachou temps a jom eus dilec'h an d'ar c'herc'h; daou c'hant lur wano dre zervez arat pe kant lur super ha kant lur azot soudek a zo mat.

Temp azotek a blij kenan d'ar c'herc'h ha digollet mat e vezoc'h ganto pa deuto an eost. A-wechou e laker kerc'h warlerc'h melchen; n'eo ket eun c'hiz fall hag eostou mat a daper evelc.

Pegoulz hada ar c'herc'h?

Ar c'herc'h goanv a c'houlenn beza hadet abred evit ma vezo krenv a-walc'h da herzel ouz ar roun. Miz du eo ar miz gwella da hada ar c'herc'h goanv.

Ar c'herc'h meur a zo mat ivez o had abred, adalek an hanter eus a viz c'houevrer betek fin miz meur.

Hadet e vez alies a-walc'h ar c'herc'h dindan ar freuziou; ar c'hiz gwella eo a godan, rak ar brini ne reont ket kement a zroug d'ar c'herc'h ha d'ar gwiziz.

Hadet e vez a-wechou all ar c'herc'h dindan ar bomm, met ar c'hiz-ze ne blij ket d'in rak re zonn e vez lakat an had. Gand an haderec e raer labour vat hag eur c'hart nebeutoc'h a had a zo ezomm eget pa hader gand an dourm.

Evel an edou all, mat eo freuzia ha krana ar c'herc'h d'an nevez-amzer, da zilasteza an donar ha da lakat ar c'herc'h da wranka.

A-wechou, pa vez re zrus ar c'herc'h e laker ar zaout warno, e miz c'houevrer pe e miz meur; n'eo ket eur c'hiz fall, pa ne lezer ket re hir ar c'hatal warno ha pa ne vez re vouk an douar.

Al louzeier fall a ra nebeutoc'h a zroug d'ar c'herc'h eget d'an ostonou all; a-walc'h ha re end-eun a reont evelato. Gwella a zo da ober eo leurel warno dour trenk soufref pe gouevr soufref.

Klennejoù ar c'herc'h

Bodadenn Breuriez-Veur ar Brezoneg d'an 13<sup>vet</sup> a Wengolo e Montroulez

D'ar meur, 13<sup>vet</sup> a wengolo, e-kenver kendalc'h ar Bleun-Brug, ez eus bet e Montroulez eur bodadenn eus hor Breuriez-Veur. — Deut d'ar vodadenn: an aotrou Ghaloni Uguen, rener evit Bro-Leon, an aotrou abad Goff eus Douarnenez, an aotrouez Ernault, pennrener, Vallée, sekretour, Ropars Hemon, Ellis, Even ha Gaurel. An sekretour, Ropars Hemon, Ellis, Even ha Gaurel. An sekretour, Ropars Hemon, Ellis, Even ha Gaurel. An sekretour, Ropars Hemon, Ellis, Even ha Gaurel.

Stag eo hor Breuriez, goude reizha an doare-skriva, da zastum ha da reizha geriadur ar yez. Savet e vezo enklaskou, evel ar re a vontomp aman, diwar-benn gerioù hor rannyezoù n'int ket bet teskaonet c'hoaz. An aotrou abad Goff a enklasko e Douarnenez war gerioù ar verdidi. Gouenn a reomp skozadha kenlabourerien evid an enklaskou-ze.

Da gromeria an eostad gerioù e savo an aotrou Ernault eur geriadurig o rei orin ar gerioù hag o verka, da heul, eo zalvoudgez e-kever ar yez skrivet. Displega a ra menad al levrig-se ha diskouez penaos e tleer er seurt sturioù en em harpa war skridoù ar gremm-amzer. Hor c'hevrened, an aotrouez Olivier ha Gourvil, o deus kavet dourskridoù talvoudek-meurbet an Tad Pelletier. Mat e ve furcha adarre da gavout eur Vuhex sant Gwennole moulet e lizerennou gotek (gwelket gant Kermarker ha kollet abao) ha « Dictionnaire de Costantien » (1)

levr dourskrid) miret eun hir amzer e kastell Trogrifon e-kichen Montroulez.

Diwar-benn an doare-skriva an aotrouez Goff hag Uguen a zo ali n'eo ket bet embannet a-walc'h reolennoù *Emgleo ar Skrivourien*. En labour eo hag a denn da hin ar yezadur (grammaire), Gouenn a zo, emez, dre-holl d'eul lev-yezadur. Dastumet en deus an aotrou Ropars-Hemon danvez eul levrig-yezadur, nemet n'eo ket peurliesha c'hoaz, emezan. Diouz e du, an aotrou Ernault a zo e venoz sevel eul levr « Grammaire historique et raisonnée ». En em glevet ar ray gand an aotrou Ropars Hemon evit ma klote an daou labour. An aotrouez Vallée ha R. Le Roux a embanno hep dale eun « Dictionnaire français-breton ».

Gouenn a ra an aotrouez Ropars Hemon ha Goff ar perag eus reolenn an araogennou (prépositions): skriva evit, gant, rak, hag all, dirag eur gensonenn hag evit, gant, rag dirag eur vogalenn. Gwel eo hen ober, a respont an aotrou Ernault, dre n'eo ket an araogennou gerioù evel ar re-all. Gerioù-harp, adgerioù n'int ken, oeh en em liamma stria-ha-stria ouz ar gerioù a den war o lerc'h. A-hend-all, eur reolenno eo ha n'eman ket e-touez ar re bouezusa. Hel lezel a heller ma kaver re ziaes.

Menleudi a rber ha goue-bennennou-kalonekaat d'al levrioù nevez, dreist-holl da *Breizeg an Douar*, gant Ropars Hemon. Galvet eo d'ober eur vad dispar. Hen erbedi a reomp start da holl lennerien Feiz ha Breiz.

Sekretour ar Vreuzier-Veur, F. VALLEE.

Berniou traoù chomet eus a zilerc'h an Amerikaned, ar C'hallaoued hag ar Zaouon. Bouteler, dilhajoù, mezer, lier, meubl, gweleou, pallennoù, linc'hioù, golo'noù, mat'kemmoù, hag all. Ar var'hadourez a brent a vezo kaset d'oc'h d'ho kdr. TI LE CORRE an ti a zo oeh obeg korn etre ar ru Branda hag ar ru Victor-Hugo, harp ouz liz Saint-Mikael VII-81.

Gouennit e ti ar marc'hadour ar Zoavon e gallec « Le Plus Chic » Henez eo ar gwella!

Entreprises J. PLOUÉ - J. COLLIÈRE 36, rue de Siam BREST Déménagements - Camionnage - Transit - Transports Calres - Wagons - Autos Capitonnés R. C. Brest 48 Ad. Tél. Victor-Brest Tél. 0-58

Evit beza asuret mat, en em adresit d'ar gompagnonez LE NORD evit hoc'h holl asuransou (ar vuez, an fao, an darvoud hag all). BOUCHE-PÉLLOU ha LE GALL, 1, ru Victor-Hugo, BREST, e korn ru Paris. (Kaset e vez brezoneg).

Klanvourien!

An efedusa eus al louzeier da grenvaat ha da buraat ar gwad eo al louzou diwar lod-mor ha raz-ekern. Hogen eus an holl louzeier diwar lod-mor ha raz-ekern — stank an niver anezo — ar reizha hag an efedusa dre ma teu war-eun eo ar bezin-mor hag an eskern fresk eo, hep mar a-wel d'an holl, an ULMINUCINE MOREUL, al louzou gallowdek-dreist, anavezet dre-holl e Breiz hag en deus savet ket kement a vuhexioù prizius.

Mammou tiegez, ha d'oc'h bugale blinik, disliw, fall da grenvaat ha diwezat da greski, pe m'erc'hed diase d'ezo dont d'o oad-krenn,

Maouezed digouezet gant tro an oad, na droiait ket da gemer an ULMINUCINE MOREUL, aozet gand an D' en Apotikerezh Th. MOREUL, loeret gand Akademi ar Medecine, ar peza a ro testeni war e ouiziegez. Kasit ho kwad, ho skopadennou, ho traoz d'ar Grande Pharmacie MOREUL, Landerne.

Stalcioù Nevezioù Bras Aux Galeries Saint-Martin 108 à 112, Rue Jean-Jaurès KOANTA NEVEZIOU GWELLA PRIZIOU Kavet e vez dilhad graet, en awans, ha graet e vez, goude kemeret ar vent; dilhad nevez evid ar wazed hag ar baotred youann. DREIST EVID AR MEZERACH DU HAG A LIQU Evit an dud diwar ar maez

AUX DAMES DE FRANCE 95, 97, 99, Straed Siam, BREST -- BRASA STALIOU ER VRO -- NEVEZIOU -- DIANKACHOU-TIEGEZ ARREBEURI -- TRAOUACHOU PARIZ Ar wella marc'hadourez evid an izela priz Ar marc'hadourez prenet a vezo kaset betek ho ti gant kirri dre dan. Tud an ti a oar Brezoneg

Hadou potach ha brouskou, hadou bleumion Hadou dibadet eus ar gwella tiez TI A. HUON Savet e 1840 L. AUDREN, DEUT WAR E LERC'H 17, Straed Siam — BREST Télég. AUDREN-GRAINES-BREST Téléph. 5-35 BINVIOU - PESKETA KERDIN - SIFELL A BEP SEURD Brezoneg en ti TI A FIZIANS R. C. Brest 49

Pompad BLEUD NOELLINE a bare Ruzderioù ar vugale NEVEZ-GANET Ar Pompad Noelline a zo ar gwella louzou ouz SPINAC'H AR BRONNOU Priz pep louzou, 18 real. Kasot e vez gand ar faktour evit 20 real. BON pour un Echantillon GRATUIT A envoyer au Laboratoire NOELLINE 75, rue de Siam, Brest



Feiz ha Breiz! a zo pevar real<sup>pevar</sup> ar pez  
BREST, MOULEREZ IAR SKRIDOU MAT, 4, STRAET AR C'HASTELL

Ar Merour: F. GEORGELIN.